

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



*Kristen ha Breizad da vireiken*

# NOZ NEDELEG

*Myster kristen en eun arvest*

EVIT AR MERC'HED YAOUANK



SANT-BRIEG

Moulez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

1913

ADRIEN DE CARNE

Barz an Arvor



891.  
682

*Kristen ha Breizad da vireiken*

# NOZ NEDELEG

*Myster kristen en eun arvest*

EVIT AR MERC'HED YAOUANK



SANT-BRIEG

Moulerez Sant-Gwilherm, 27, bali Charner

—  
1913

## ARGUMENT

Marguerite est veuve. Elle a trois filles. Une d'elles, Annette, est aveugle. Au retour de la messe de minuit, elles donnent l'hospitalité à une jeune femme très pauvre, tenant par la main un enfant de trois ans. La jeune femme prend un instant la petite Annette dans ses bras, et lui donne miraculeusement la vue. Deux anges apparaissent et les humbles servantes de Dieu s'aperçoivent, avec une joie céleste, qu'elles ont reçu, dans leur chaumière, la Vierge Marie et l'Enfant-Jésus.

---

Diocèse de  
**Quimper & Léon**  
Evêché de Quimper et Léon

Document numérisé en 2016

## TUD AR MYSTER

MAC'HARID, *intanvez paour, mamm Yanned*  
*Annaig ha Katelig.*

YANNED, *13 vloaz.*

ANNAIG, *dall-put, 11 vloaz.*

KATELIG, *7 vloaz.*

MADALEN, *amezegez da Vac'harid.*

C'HOAR YVONA, *leanez wenn ar Spered Santel.*

EUR VAQUEZ YAOUANK, *paour, paour.*

HE MABIG, *3 bloaz.*

DAOU EAL.

Eur c'hoz ti soul e Breiz-Izel. Kadoriou. Eur bank. Eun daol. Skeudenn ar Werc'hez hag eur grucifi ouz ar voger.

*J. F. Gogio,  
maestred de Gloned*

## KENTA DIVIZ

YANNED, KATELIG, *Erc'h war o mantellou*

YANNED

Deus, Katelig, deus, va c'halounig. Tenn da vantel. *Katelig a glask hen ober ha n'hell ket. Gortoz ! emañ o vont da rei skoaz d'it. Yanned a denn mantel he c'hoar hag he hini.*

KATELIG, *nec'het*

Ha va mamm ? Hag Annaig ? Perak ta ne zeuont ket en dro ?

YANNED

Bez dinec'h. Hor mamm a zeu war hon lerc'h. Mes n'eo ket evit dont en dro ker buhan ha ni, o veza ma teu goustadik, dourn ha dourn gant Annaig. Ha pedet start ec'h eus evit Annaig epad oferen ar pelgent ? Paour keaz Annaig ! Pebez rann-galoun eviti beza dall ! Ha pedet start ec'h eus, ive, elez ar c'hraou Santel, ha Perig, hor breur bihan, a zo breman eun ealig evelto, p'eo gwir ez eo marvet warlene ?

KATELIG

Ia, pedet mat em eus, dre m'az poa hel lavaret d'in. Mez her great em eus evit netra, evel a welez. Annaig a zo dall kouls ha diagent. Ha mar en divije ar Mabig Jezuz he fareet, hi a vije deuet en dro buhanoc'h. Ha n'eo ket distro, na va mamm kennebeut.

Lounek int bet. marteze, o diou, gant eur bleiz.

YANNED, *o c'hoarzin*

Gant eur bleiz ? Pell bras zo n'eus mui a vleizi e Breiz.

KATELIG

Sell ! Perak ta neuze, pa vezez ouz va gourdrrouz, e leverez atao : Deuit bleiz ! deuit bleiz !

YANNED

Gwir eo. Bez 'ez eus eur bleiz c'hoaz, unan hep mui ken, unan koz koz, evit ar vugale vihan, pa vezont drouk.

KATELIG

Mat. Mar d-eo koz koz, n'em eus tamm aoun ebet dirazan, me, rak dizant eo, a dra zur.

YANNED

N'eo ket.

KATELIG

Eo, eo. Tad koz, Doue r'e bardouno, oa hen ive koz koz pa 'z eo marvet. ha n'oa eur c'hoz tamm dant-zoken en e c'hinou. Kea ta ! Gouzout mat a ran, me.

MAC'HARID, *er meaz*

Digorit an nor, va bugale, digorit buhan. Ien bras bras eo anezi.

YANNED, *da Gatelig*

Klevet a rez ? Setu i o diou o tont.

## II DIVIZ

AN HEVELEP RE, MAC'HARID, ANNAIG, *erc'h war o mantellou.*

KATELIG

Aoun am eus bet, mamm, dre ma ne zeuec'h ket en dro, Annaig ganeoc'h.

MAC'HARID, *o tenna he mantel hag hini Annaig, hag oc'h ober d'he merc'hig dall azeza*

Evel a ouzout, va c'heazik, an erc'h a gouez, avel vras ar mor a zo dirollet ha kounnaret. Dre eur seurt amzer, n'eo ket da c'hoar evit bale ker buhan ha te, na petra 'ta ?

KATELIG

Ba, ba, ba ! dre ma ne oar ket. Me avat, a gersfe buhan n'eus forz e peleac'h, a dreuz d'an avel, a dreuz d'an erc'h, er glao, en dour, e kreiz ar fank.

MAC'HARID

Ha zoken pa vijes dall ?

KATELIG, *fouge enni*

Ia.

MAC'HARID

Mat. Ni a welo. *Mac'harid a skoulm eur mouchoer oc'h daoulagad Katelig, evel pa ve ouz he lakaat da c'hoari mouchik dall. Allo ta ! bale. Katelig a astenn he dioreac'h a gleiz hag a zeou hag en em laka da ouela dourek ha da hirvoudi. Petra ta ? Bale ! bale 'ta ! Katelig a ouel adarre. He mamm a denn ar mouchoer diwar he daoulagad. Kea ! ha lavar bennoz d'an Aotrou Doue, en deus great da zaoulagad sklear ha digor frank. Ac'hanta ! va bugale, azezit oc'h an daol, ma roin d'eoc'h peb a skudelladig leaz tomm. Ar vugale a azez. Mac'harid a ia da gerc'hat ar skudellou.*

KATELIG, *o sellet ouz ar meaz*

Mamm !

MAC'HARID.

Petra zo va c'hoantik ?

KATELIG

Gwelet em eus, adre ar prenestr, eur sklerijen  
vihan hag eun itroun gaer, gwenn he sae.

YANNED

Kousket a rez. Eun huvre n'eo ken.

KATELIG, *droug eun tammig enni*

Nan, nan ! ne gouskan ket. Gwelet em eus eun  
itroun wenn o tont aman. Sellit, setu hi. *Choar  
Yvona a zeu, eur baner ouz koubl he breac'h, eul  
leternig war elum en he dourn. Yanned ha Katelig,  
laouen o diou, a ia d'he c'hichen.*

### III DIVIZ

AN HEVELEP RE. — C'HOAR YVONA

YANNED ha KATELIG, *a-unan*

C'hoar Yvona eo ! C'hoar Yvona eo !

C'HOAR YVONA

Ia, va bugaleigou. Méz eur pennadig n'em eus  
ken da jom aman. Dont a ran a berz dimezelled ar  
c'hastel. Gourc'hemennet o deus d'in ma tigasín  
d'eoc'h traou mat bennag evit ho noz Nedeleg.

C'HOAR YVONA, *o tenna an traou er  
meaz eus he faner.*

Sellit ! barä fresk, amann, kouignou, eur vou-  
taillad gwin koz.

MAC'HARID

Nag i zo mat ha karantezus an dimezelled se, va  
c'hoar geaz. Doue r'o binnigo ha c'houi ive, o tont  
eus o ferz.

YANNED

Ni a ielo hirio va mamm. d'o zrugarekaat.

MAC'HARID

Ia, va merc'hig.

KATELIG

Me gar va c'hoar Yvona a greiz va c'haloun.

YANNED, *o c'hoarzin.*

Ha perak ? Dre ma 'z eus kouignou ganti.

KATELIG

Ne ket gwir, fri marmouz ac'hanout. Ne ket evit  
an dra ze eo.

YANNED

Perak ta, neuze ?

KATELIG

Dre ma felt d'in mont da leanez, evelti, pa vin  
bras, evit m'am bezo ive eur zae wenn, hag eun  
evnig a istrilbilh oc'h va gouzouk. *C'hoari a ra  
Katelig gant evnig arc'hant c'hoar Yvona.* Sell !  
sell oc'h al labousig arc'hant.

ANNAIG

Mamm ! Red mat eo d'eomp lavaret da Vadalen  
dont da goania ganeomp. Hounnez zo paouroc'h  
c'hoaz egedomp ni, ha n'he deus tamm da zibri en  
noz ma, 'm eus aoun.

YANNED ha KATELIG *a-unan*

Ia mamm ! ia mamm !

C'HOAR YVONA

Te zo mat da galoun Annaig ; te a vezo benniget,  
er bed ma zoken, marteze. (*Da Vac'harid*). Ha  
Madalen, piou eo hounnez ?

MAC'HARID

C'houi oar ervat, va c'hoar. Madalen eo ar vaouez  
se ker paour, amezegez d'in. Intanvez eo, eveldoun

me. Eur c'hrouadur n'he doa ken Yannig, eur paotrig pevar bloaz evel Perig, va hini me. Mervel a reas, warlene, d'ar memez mare, kouls lavaret, ma tremenas ive va hini. Me avat, teir merc'h a jom ganen, e leac'h Madalen a jom hi he unan penn war an douar. Eur zantez eo, va c'hoar, hag a rofe he zamm bara diveza da viret oc'h eur paour da vervel gant an naoun. Galvit hi, va bugale, galvit hi !

YANNED ha KATELIG, *o vont o diou  
da skei war ar speuren.*

Madalen ! Madalen ! deuit 'ta. Hor mamm eo a fell d'ezi ho kwelet.

MADALEN, *en tu all d'ar speuren*  
Gwir, va bugaligoù ? Dont a ran dioc'htu.

YANNED  
Ema o tont, mamm ; em a o tont dioc'htu, emezi.

MAC'HARID  
Mat, va bugale. Laouen oun o welet e karit ar re a zo paouroc'h c'hoaz egedoc'h. *Madalen a zeu.*

#### IV DIVIZ

AN HEVELEP RE. — MADALEN

MADALEN  
Va galvet hoc'h eus, va Mac'harid vat ? Petra a e'houlennit diganen ?

MAC'HARID  
Ma reot eur blijadur vras d'am merc'hig Annaig. Va merc'h a fell d'ezi e chomfec'h da goania ga-neomp. Va c'hoar Yvona he deus digaset d'eomp traou mat a berz dimezelled ar c'hastel.

MADALEN

Ho trugarekaat a ran a wir galoun, Mac'harid, ha te ive, va mignounezig. Me hag a zo glac'haret atao va c'haloun, n'oan ket evit kredi e welfen, en noz man, m'ousc'hoarz ar vugale, goude mousc'hoarz elez oferen Nedeleg.

C'HOAR YVONA

Lavaret em eus d'eoc'h na ven ket evit chom pell aman. Kenavo, bugale, ha ra vezo laouen hoc'h askoan.

AN HOLL, *a unan*

Kenavo, Kenavo, c'hoar Yvona. *Katelig a bok d'ezi. C'hoar Yvona a ia huit. Yanned a ia da gerc'hat Annaig evit he c'has beteg an duol.*

#### V DIVIZ

AN HEVELEP RE, *nemet C'hoar Yvona. An holl a jom en o za, o daouarn e kroaz.*

MAC'HARID

Plijet ganeoc'h, va Doue, binnigen ar boued roet d'eomp gant ho madelez.

AN HOLL

Evelse bezet great ! *Azeza a reont en dro d'an daol hag e tebront.*

KATELIG

Nag i zo mat ar c'houignour ze. O, mamm ! roit re all.

MAC'HARID

Ne rin ket. Kalz ez eus anezo, gwir eo, mes c'houi a blijo d'eoc'h o c'haout adarre warc'hoaz.

ANNAIG

Unan bennak en deus skoet war an nor.

## YANNED

Tamm ebet. Eul logoden eo o skrabat, o firboucha er c'hrignol.

## ANNAIG

Skoet ez eus bet. a dra zur. Me zo dall, hag ar re zall a zo fin bras o skouarn.

## MAC'HARID

Mat. Tavit, neuze. Mar en deus unan bennak skoet, e skoio adarre. Selaouomp. *E skoer tri daot bihan war an nor.*

## ANNAIG

Me a ouie avat. Klevet mat em boa.

MAC'HARID, *huel he mouez*

Piou zo aze ? Petra fell d'eoc'h ?

EUR VAQUEZ PAOUR, *er meaz*

Eur vaquez paour eo, o vont da vervel gant ar riou.

## ANNAIG

Mamm ! roomp digor d'ar baourez a c'houlén. Ni a roio d'ezhi da zibri hag he lakaio da domma e tal an tan.

MAC'HARID, *o sevel hag o vont da gichen an nor.*

N' hoc'h anavezán tamm ebet, ha ne gredán ket digeri va dor e kreiz an noz.

AR VAQUEZ PAOUR, *er meaz*

N'ho pezo ket a geuz da veza va digemeret. Goulen a ran digant ho truez ma tigorot an nor d'in. An erc'h a gouez. Ema va faotrig o vont da vervel ma n'hellin ket e domma eun tammig. Roit an digor d'eomp en hano Jezuz.

ANNAIG, *e daouarn e kroaz*

En hano Jezuz, va mamm, en hano Jezuz !

## MAC'HARID

Ma livirit eun hano ker santel, n'oun ket evit ho lezel da jom er meaz. *An holl a zav dioc'h an daol, nemet Annaig. Mac'harid a zigor an nor. Eur vaquez yaouank, paour, paour, a zeu ebarz dourn ha dourn gant eur paotrig tri bloaz. Gwisket int o daou gant dilhad fall, erc'h warno, o zreid noaz.*

## VI DIVIZ

AN HEVELEP RE. — AR VAQUEZ PAOUR. AR PAOTRIG

## AR VAQUEZ PAOUR

Pidi a ran an Aotrou Doue ma skuillo e venno-siou war an ti man, ha war ar re a jom ennan, abalamour d'o c'harantez evit ar beorien.

## MAC'HARID

Allaz ! n'hon eus tra, kouls lavaret, da ginnig d'eoc'h, mez an nebeut hon eus, a wir galoun eo her roomp, Azezit aze, maouez paour. *Ar vaouez a azez hag e laka he c'hrouadur war he daoulin.*

## KATELIG

Me, da genta, a fell d'in lakaat va mantel en dro d'ar potrig. Krena ra gant ar ricu. *Ez a da gerc'hat he mantel hag he laka, war ar bujel.* Dal ! keazik karet, setu kouignou ; debr ! *Ar bujel a zebr ; stlaka a ra Katelig gant e daouarn.* Dibri a ra, mamm ! Dibri a ra !

## MAC'HARID

Mat hon eus great, te a wel, o chom hep o dibri holl.

YANNED

Eun tamm bara ho pezo, itroun, gant eur banne gwinn tomm !

AR VAQUEZ PAOUR

Bennoz Doue d'eoc'h, va merc'h ; mes n'em eus ezom ebet a voued.

YANNED

Me a fell d'in goulenn diganeoc'h ma reoteur blijadur zispar d'in.

AR VAQUEZ PAOUR

Pehini ?

YANNED

Ma ve ho madelez va lezel da c'hoari eur penna-dig gant ho paotrig keaz.

AR VAQUEZ PAOUR

A galoun vat, mignounezig. *Rei a ra he faotrig da Yanned. Houman a laka ar bugel da azeza war eur bank en he c'hichen hag a ra allazig d'ezan.*

MADALEN, o tostaat ouz ar bugel

Pebez bugelig kaer ! Nag hen zo koant ! N'oun ket evit miret oc'h va daoulagad da ouela o sellet outan, rag ar paotrig a zo eat kuit diganen oa ker koant, pe dost, hag heman. *Madalen a zec'h he daoulagad.*

ANNAIG

Na c'houi zo evurus holl ! Ne welan ket, me ar c'hoantik se, mez her c'harout a ran, p'eo gwir her c'harit, ha me zo laouen koulskoud.

AR VAQUEZ PAOUR, da Vac'harid

Ho paour keaz merc'hig a zo dall 'ta ?

MAC'HARID

Dall abaoe ma 'z eo ganet, siouaz !

AR VAQUEZ PAOUR

Pet vloaz eo ?

MAC'HARID

Unnek vloaz.

AR VAQUEZ PAOUR

Hag ar vedisined ? Petra o deus lavaret ?

MAC'HARID

Re baour e oamp evit o faea. Unan anezo a zo deuet evit netra, ha pidi start a ran an Aotrou Doue bemdez evitan. Mes dioc'h e lavar, den n'helllo bi-ken parea va merc'h.

AR VAQUEZ PAOUR

Ha c'houi a gred, evelato, e-c'hellfe an Aotrou Doue, hen, he farea.

MAC'HARID

Her c'hredi a ran a greiz kaloun. Mez Annaig n'eo ket bet fellet d'ezi, morse, her goulenn digantan.

AR VAQUEZ PAOUR

Na perak 'ta keazik ?

ANNAIG

Mar d'oun me deuet dall er bed, itroun, an Aotrou Doue eo en deus her c'hemennet, ha va mamm a lavar e rankomp adori a grenn ar pezh a ra.

AR VAQUEZ PAOUR

Ha ma rofe d'it ar gweled hep n'her goulenn digantan, te a-ve bras da levenez evelato ?

ANNAIG

Bras bras, itroun.

AR VAOUËZ PAOUR

N'anavez ket ac'hanoun, tamm ebet. An aoun a zo krog ennout, eun tammig, marteze, dirazoun. Daoust-ha te a blijfe d'it dont da azeza eur pennadig war va daoulin ?

ANNAIG

Lapuen oc'h hen ober, itroun. N'hellan ket ho kwelet, gwir eo. Mes karout a ran ho mouez. Flour eo evel eur ganaouenn gaer, hag henvel eun tamm, a gredan, oc'h kleier iliz.

AR VAOUËZ PAOUR

Deus d'am c'haout. *Mac'harid ha Madalen a gas Annaig hag he laka war daoulin ar vaouez paour. Houman a gemer Annaig en he dioreac'h. Ober a ra d'ezi karanteziou epad eur pennadig, hag e sell outi hep lavaret grik.*

ANNAIG

O, itroun vat ! Na dudius eo beza en ho tivreac'h ! Krèdi a ran emaoun etre re va mamm !

AR VAOUËZ PAOUR

Lavaret a rez mat, bemdez, da bedennou ?

ANNAIG

Pep mintin ha bemnoz, hag epad an noz, ive, a weachou, pa vez poan va daoulagad o viret ouzin da gousket.

AR VAOUËZ PAOUR

Neuze 'ta, e karez Jezuz ha Mari ?

ANNAIG

Gant holl garantez va c'haloun.

AR VAOUËZ PAOUR

Mar karez anezo, kreli a rez ez out karet ive ganto ?

ANNAIG

Her c'hredi a ran, itroun.

AR VAOUËZ PAOUR, *hueloc'h eun tamm he mouez.*

Ealig dall, plac'hig fur ha karantezus, en hano Jezuz hag en hano Mari, digor da zaoulagad ha gwel !

ANNAIG, *o tigeri he daoulagad hag o leuskel eur griadenn*

O, itroun ! pebez tra vurzudus ! Me a wel ! Me a wel ! *Redek a ra da gaout he mamm, Madalen, Yanned ha Katelig.* Mamm ! Mamm ! me ho kwel ! me ho kwel ! O, itroun ! penaos 'ta loc'h eus great ? O levenez ! Gwelet a ran ive ho paotrig ker kaer ! Petra da ober ? Penaos e c'hellin me ho trugarekaat ?

AR VAOUËZ PAOUR

Dre veuli Doue.

MAC HARID, *tenereet he c'haloun*

Krena ran gant al levenez ha gant an anaoudegez vat. Piou oc'h, itroun ? Eun eal ? Eur zantez ? Eur zantez vras ? Petra a c'hellan me ober evidoc'h ? N'em eus tra, siouaz ! va c'harantez n'em eus ken.

AR VAOUËZ PAOUR

Awalc'h eo. Mes mar fell d'eoc'h plijout d'am c'haloun, mar fell d'eoc'h va faea mat, va list, mar plij, da gousket en ho kichen gant va c'hrouadur.

MAC HARID

Me roio d'eoc'h va gwele.

KATELIG

Ha me roio va hini d'ar bugelig.

AR VAQUEZ PAOUR

N'her greot ket. Kasit ac'hanoun d'ar c'hraouig goullo a zo tost d'ho ti. Kousket a rin aze, e mesk ar c'holo, va mabig em divreac'h, ken na zeulo an deiz.

MAC'HARID

N'hellan tamm ebet. Me a grogfe mez ennoun ouz ho lezel da vont....

AR VAQUEZ PAOUR

Ma ne fell ket d'eoc'h, ez in kuit. Bale a rin e kreiz an noz, a dreuz d'an erc'h. Va bugelig en devezo riu adarre, ha me ouelo. Mar am c'harit, grit ar pezh a c'houlenan.

MAC'HARID

Deuit, itroun. Me avat, a zo gwall c'hlac'haret va c'haloun ouz ho kas d'eul leac'h ken dister. *Mac'harid a ia kuit. Ar vaquezh paour a ia war he lerc'h, he bugel ganti.*

## VII DIVIZ

MADALEN, YANNED, ANNAIG, KATELIG

MADALEN

Pebez burzud, Annaig ! pebez tra souezus !

ANNAIG, *he daouarn e kroaz*

Na c'houi zo mat, va Doue ! Nag hen zo kaer ar bed ! Me ho kwel, Madalen, me ho kwel. Yanned ha Katelig ! Peger koant oc'h ! Gwelet a ran liou ho taoulagad, bleo hir va c'hoarezed o c'holei o diouskoaz ! Gwelet a ran, ouz ar voger, Jezuz war e groaz ha skeudenn ar Werc'hez. Piou eo, avat, ar vaquezh vat se he deus va fareet ?

KATELIG

Eur rouanezh vras, a gav d'in, dilhad paour warni.

YANNED

Eun itroun vras gwiziek ha karantezus, he deus desket kaer an holl louzou evit parea ar beorien.

MADALEN

Sellit, bugale. Setu ho mamm o tont en dro. Emaoun o vont da zistrei d'am zi. *Mac'harid a zeu en dro.*

## VIII DIVIZ

AN HEVELEP RE. MAC'HARID

MAC'HARID

Mat. Ar vaquezh keaz a gousk, war golo, gant he mabig. Va c'haloun zo mantret a ze. Mes n'oun ket evit gouzout pe e kouskan pe ne gouskan ket. N'eus nemet burzudoù, en noz man, en hon ti paour. Epad ma teuen en dro, edo an erc'h o paouez koeza : bolz an env a lugerne gant mil ha mil steredenn, ha war c'horre an ti, traou e oa o nijal. Kredj a rean e welen me daou labous bras ha kaer kenan, gwenn kann o daou.

KATELIG, *o sellet ouz ar meaz*

O gwelet a ran, mamm ! o gwelet a ran ! Emaint o tont en ti. Setu int. *Daou ealig gwenn a zeu unan dre gleiz, eun all dre zeou.*

## IX DIVIZ

AN HEVELEP RE. AN DAOU EALIG

AN EALIG KENTA

Epad an noz Nedeleg man, Doue en deus kemenet d'eomp disken en ti paour man, karet gantan. *Da. Vac'harid..Mac'harid, me eo eal mat l'perig, da vugel, marvet warlene. Ema er baradoz ha goulenet en deus diganen ma roin d'it eur pok eus e berz. An ealig a bok da Vac'harid.*

AN EIL EALIG, *da Vadalen*

Ha me, Madalen. me eo eal mat Yannig, da  
ugelig. Hen a fell d'ezan, ive, ma pokin d'it. Te  
fell d'it ? Lavar. *Poket a ra da Vadalen.*

AN EALIG KENTA

Ar vaouez paour ac'h eus digemeret en noz man,  
Mac'harid, hounnez eo ar rozen vurzudus, stereden  
ar mintin, ar Werc'hez santel meurbed, Mari hi he  
unan.

AN EIL EALIG

Gant ar Mabig Jezuz dindan ar furm eus eur  
paotrig.

AN EALIG KENTA

Gwerc'hez karet ha santel, ha c'houi, Mabig  
Jezuz, plijet ganeoc'h en em ziskouez da zaoulagad  
laouen ho servicherezed.

AN EIL EALIG

Deuit d'o binnigen, deuit da skuilla al levez  
war o eneou. *Ar Werc'hez Vari a zeu, dourn ha  
dourn gant ar Mabig Jezuz. He sae a zo gwenn, he  
goel glas. Ar Mabig a zo gwenn e zae gant eur  
gouriz aour. Eur galons aour a sked en dro d'e  
benn. An holl hag an elez en em strink war o daou-  
lin.*

X DIVIZ

AN HEVELEP RE. — AR WERC'HEZ, AR MABIG JEZUZ

AR WERC'HEZ

Deuet oun aman da zellet a dost ouz ho kalounou.  
Karantezus int, dioc'h a greden. Rak se, pareet em  
eus Annaig. N'hen ankounac'haio ket, fizians am  
eus.

ANNAIG

N'hen ankounac'hain biken, Gwerc'hez santel,  
hag ho karout a rin bemdez muioc'h mui.

AN EALIG KENTA

Ema ar c'hillog-o vont da gana, ha ni da zistrei  
d'an envou.

AN EIL EALIG

Ema ar goulou deiz o vont da lugerni, ha ni da  
zistrei d'an envou.

ANNAIG

N'her grit ket ! en han' Doue ! chomit, chomit  
c'hoaz eur pennad. N'em eus ket bet amzer,  
awalc'h, da zellet ouzoc'h, Santez Mari, ouz ar  
Mabig Jezuz, ouz an ealedigou, gant va daoulagad  
m'eo fellet d'eoc'h rei ar sklerder d'ezo.

AR WERC'HEZ

N'omp ket evit chom pelloc'h amzer, paour pla-  
c'hig keaz. Mar chomfemp aman, an douar a zeufe  
da veza henvel oc'h an env, ha n'hell ket beza.  
Kenavo, va merc'hed karet.

MAC'HARID, *glac'haret*

Allaz Doue ! n'ho kwelimp ken, neuze ?

AR WERC'HEZ

Eo, er baradoz, m'emaoc'h, dre c'hras Doue, o  
vare war an hent a gas davetan.

MADALEN

Karomp, binnigomp ha meulomp, breman ha da  
viken hanoiou santel Jezuz ha Mari !

AN HOLL HAG AN ELEZ

Evelse bezet great !

*Ar goel a zisken*

